

Disdosteit oll dud a skiant, me ho ped hag ho supli
Rag me a zo aman bourdet, gant ma oll filosofi.

Klevet a ran mouez ar zoner pozet war he variken,
Tanañ ra diskouarn ar merc'hed, ha sevel a rant ho fenn.

A dioustu kommansen bresken, dreist an ed hag ar parkou
'Vel pa ve an diaoul war ho lerc'h, peotramant an Ankou.

'Vel pa ve an diaoul war ho lerc'h, peotramant an Ankou
Na pa ve n'lfenn da da dreuji bepred a c'hant d'an dansou.

Pa ven arru war ar blinen, elec'h eman an ebat
Evit n'em diskouei d'ar wased, ha klaskont eur c'hleun bennak

Graet ve eur sav d'an davanjer, eur fich da golinetenn
Unan a ra eur sell lagad, hag eben eur c'hoarsadenn.

Eur baotred deus an tu-all, dastumet a vandennou,
N'in ket 'vit dere'hel ho bragou, ennezh kavet bretellou.

Ma eur laez deus penn ho frio, gant ho mammou roet d'he,
Pemp enne n'a n'int ket kapab, da gas eur vioc'h d'ar c'hoele.

Pemp pe c'houech na n'int ket kapab, da gas eur vioc'h da c'hoele
Chetu aze ar pitardet, a ve vale noz ha deiz.

.....

Me m'eus klevet o lavaret, kredi 'ran penoz ma gwir;
Eun den 'n'kichen he vuhan karet, na kav ket an amzer hir.

Pa ve aze an den yaouank, kichen he vuhan karet
Na pa ve daou deiz 'n'unan, n'ive na naon na sec'het.

Recuete Jean 7th Lebrun del

Kanet ganr yvoan an DORNER; 83 bloaz, C'harsmeur, PLIJIDI
9 C'houervre 1947